

De gourz kaer er bokedeu.

D'er ré em har.

"Arhoah e vo dé hoah ha me varvo". Pascal

A pen dé gwir 'ma red dein abenn arhoah merùel ;
A pen dé ken tost mem bé de véùenn me havell ;
Araog ma tei er Marù yen de sklasein me halon,
Eid hé disamm, me laro hé hoanteu d'en dason

Ém digaré devéhañ, pe vein é tenn dohti,
N'em lézet ket de vougein étré peder magoér.
Eid lemel a men gwéled reihted marù en treustér,
Durheit me selleu d'en né, pelleit mé doh peb ti.

Un deùeh klouar a viz mae, ardro er goubanùel,
Ma selleu ar en èbr don, é karehen merùel.

Pelleit mé doh en tiér, er hanveu didalvé,
Ha douget mé 'dan er gwé, én ul léhig distro,
Ma kleùein doh men gronnein frondeu heb par mem bro
Ha ma serro me lagad goalhet a vraùité.

A pen dé kaerrañ mem bro é karehen merùel,
Un deùeh klouar a viz mae, ardro er goubanùel.

Doh troed ur wéenn yaouank em es lakeit én douar,
Edan mantell gwér er man, krouizet neuzé mem bé
Émesk er gouriad radén, émesk er gouriad gwé,
Ma servijo men dismant de vraùité er barr.

Un deùeh klouar a viz mae, ardro er goubanùel,
Ar vantell flour er man dous é karehen merùel.

Ar mem bern douar benniget, lakeit kroéz me Salvér
Em es heuliet lamm-ha-lamm, heb neoah En nahein,
É klask mond ar é drechad, dré en drein hag er vein,
Ar henteu en digasted, de zihun mem breudér.

Ne glaskan 'med é drué. Dein ne ouélet ket hwi ;
Rag er Peuh meur e hoanten, kavet em mo ean mé,
Bet en devéhañ kuh-héol, kuhunet barh mem bé,
Pell doh er bèredeu tud ré lan a vrazoni.

Un deùeh klouar a viz mae, ardro er goubanùel
E peuh genoh, o men Doué, é karahen merùel.

Lézet, ar er breinanté, de seùel ti er Foll :
En huanadeu palforset, er skrideu-bé gaouiad,
Er bokedeu divuhé, er bodeu touzet mad,
Nen dint oll nemed steuenn gouél é randon diroll.

Disamm kaer a don en dud é karehen merùel,
Un deùeh klouar a viz mae, ardro er goubanùel.

Ne zoujet ket evidon diaménded mem bé ;
Gwéh erbed n'em es kavet me euriadeu ken berr
El p'hellan ged me sonjeu chomel me-unan-kaer :
Gwéh erbed ne vem kement èl ma ven mé neuzé.

Un deùeh klouar a viz mae é karehen merùel,
Pe ne san mui grig en douar, ardro er goubanùel.

Hag evid derhel mad dein boud em mo, noz ha dé,
En éned em es karet : er veurig hégarad
E oursailè troèdant dein, pe vezen éh arad ;
Gwell e hortan hoah kaoud : neuzé boud em mo Doué.

De gourz kaer er bokedeu é karehen merùel
Ha kaved é Doué repu, ardro er goubanùel.

De luskellad me hun hir boud em mo kan en én ;
Liùaj kant bokedig biù de gaerrâd me hlazenn,
Ha bouéh er gwé 'm es hadet de voudal dreist me fenn
Hirvoudeu glaharusoh, donnoh éged ré dén.

Un deùeh klouar a viz mae é karehen merùel,
A p'arsaù kan er bodeu ardro er goubanùel.

A ouélereh, a vrageu, mé ne vein ket forhet :
A pe zeï en dilost-hañù hag é vizieu tioél,
Ma houél en dél o dareu hag er barreu o dél,
É tevalo ar mem bé aour ha dareu kéjet.

Heb gwéled dén é houélein é vourrehen merùel
Pe serr lagad er vleuenn, ardro er goubanùel.

Er minotenneu bourruz em es darempredet
E hello neuzé diskuih ha glasâd a neùé ,
Elsé m'énéañù dijabet a dreban er vuhé
Erfin e vleuo dihaod doh splanndér en Drinded.

De gourz kaer er bokedeu
Ardro er goubanùel,
Pe vè er benal é bleu,
É karehen merùel ;
Ha diskenn é noz tioél,
Med konfortuz, mem bé,
Pe seblant en héol merùel
Én tural d'er mané...

L. Herrieu.

Dasson ur galon. Les résonnances d'un coeur - Embannadurioù Dihunamb, 1957.